



Reolennoù priz danevelloù Ti-Kêr Karaez

1. Digor eo ar genstrivadeg d'an holl dud n'eus forzh e pelec'h e vefent o chom er bed.
2. Ar skridoù a rank bezañ e brezhoneg peurunvan, skritur dibabet gant Diwan.
3. Ar skridoù a rank bezañ krouidigezhioù gwirion. An danevell a ranko bezañ bet embannet en ul levr pe en ur rollenn lennegel bloavezh ar saloñs, pe bezañ nevez-savet ha kinniget gant un ti-embann.
4. Ne vo kaset nemet un danevell dre genstriver.
5. Ul loread(ez) bet ne c'hell ket kemer perzh en-dro er priz e-pad 5 bloaz.
6. Skriverezet e vo ar skrid.
7. Niver a arouezennoù en destenn : etre 15 000 hag 20 000 arouezenn d'ar muiañ hep kontañ an esaouennoù.
8. Tem : dieub ha digor d'ar seizh avel.
9. N'hell ket izili ar juri kemer perzh er genstrivadeg.
- 10.1 500 Euro a vo roet d'an hini a yelo ar maout gantañ. Bez e c'hell ar juri chom hep reiñ ar priz ha/pe reiñ ur priz kalonekaat.
11. Roet e vo ar priz da-geñver Gouel al levrioù e Breizh e Karaez. Bez e ranko al loread(ez) bezañ e Karaez da resevout ar priz.
12. Ar gwirioù war ar skrid a chom gant an aozer.
13. Der gemer perzh er genstrivadeg-mañ e tisklêr ar perzhiad asantiñ d'ar reolennoù ha da zivizoù ar juri.